

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 1	Danzeadoù pleustret warno
1-a) Dor ar c'harr a zigor ar vugale : erru int en diwezh ! An holl da redek da welout ar mor. Krog eo ar vakañsoù.	<ul style="list-style-type: none"> • Kregiñ ar frazenn gant ar renadenn-dra. • Liester an anvioù • Kemmadurioù k/c'h ; b/v • Kemmadur dre vlotaat goude “holl” ha “da”. • Amzer vremañ • Amzer vremañ kevrennek • z / zh
1-b) Digoret eo dorioù ar c'harr. An holl diegezhiaed a zifoup er-maez hag a red betek ar chaoser da welout ar mor. Echu eo ar veaj hir-se en diwezh.	
1-c) Kroget fall e oa ar vakañsoù evit an tiegezhiaed-se peogwir e oa chanet ar c'harr nebeut amzer goude bezañ aet kuit. Met gwelet o deus ar mor memes tra.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
1-a) karr – diwezh – holl – vakañsoù 1-b) tiegezhiaed – er-maez – chaoser – beaj – hir 1-c) chanet- nebeut –peogwir	
Reizhskrivadenn prouad	
Echu eo ar veaj hir-se. Gant dale ez int aet kuit peogwir e oa chanet ar c'harr. An holl diegezhiaed a zifoup er-maez ha redek a ra ar vugale war ar chaoser da welout ar mor. Krog eo ar vakañsoù en diwezh !	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 2	Danzeadoù pleustret warno
2- a) Glav-pil a ra. Gleb-teil eo douar al liorz. Kuzh eo an evned.	<ul style="list-style-type: none"> * Verb “bezañ” • An anv klokaenn an adanv • Furm bihanaat an anv. • Kemmadur dre vlotaat en anvioù benel unander. • Amzer-vremañ • z /zh
2-b) Abaoe teir eurvezh e ra glav. C'hwezhañ a ra an avel ha skubañ delioù ar wezenn gozh.	
2-c) Glav hag avel zo abaoe penn-kentañ ar beure. Un evnig bihan treut zo o krenañ war ar wezenn.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
2-a) glav-pil – gleb-teil – liorz – kuzh – evn 2-b) abaoe – teir – c'hwezhañ – delioù – gwezenn 2-c) evnig – krenañ – kentañ – kouezhañ	
Reizhskrivadenn prouad	
Glav-pil a ra abaoe penn-kentañ ar beure. An delioù, skubet gant an avel, a nij hag a gouezh war an douar gleb-teil. War wezenn gozh al liorz ez eus un nebeut evnedigoù o krenañ.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 3	Danzeadoù pleustret warno
Ur plankenn koad brav emañ tad o heskennañ hag o rabotañ. Emañ o kempenn ur stalenn da lakaat ouzh moger ar gegin.	<ul style="list-style-type: none"> • plankenn (gourel) • muzuliañ (muzuilhfe) • gervel (galv)
Abae ur pennad amzer emañ mamm o c’hervel tad. Fellout a ra dezhi e vuzuilhfe tad ar gegin da lakaat ur stalenn ouzhpenn.	
Emañ tad o jediñ da c’houzout pelec’h e vo ar gwellañ da lakaat ar stalenn goad.	
Gerioù da c’houzout skrivañ	
3-a) plankenn – heskennañ – kempenn – stalenn – moger – kegin. 3-b) pennad – gervel – fellout – muzuliañ – e vuzuilhfe – ouzhpenn – lakaat. 3-c) gouzout – pelec’h – gwellañ – galv – kêr.	
Reizhskrivadenn prouad	
Emañ tad o labourat er gêr da lakaat stalennoù nevez ouzh moger ar gegin. Abae ur pennad emañ o jediñ, o heskennañ, o rabotañ, o vuzuliañ ur plankenn koad. Echu e labour gantañ e c’halv mamm.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 4	Danzeadoù pleustret warno
4-a) E-pad an ehan e red ar vugale hag e chom ar vistri war evezh war ar porzh.	<ul style="list-style-type: none"> • zh • kemmadur dre vlotaat goude ar ger-mell evit an anvioù tud liester • o ≠ ho
4-b) Seniñ a ra ar c’hloc’h : echu eo an ehan. Mont a ra ar vugale daou ha daou en o renk.	
4-c) E-pad an ehan e ra darn eus ar vugale o mad eus ar prantad-se evit diskuizhañ, kontañ istorioù ha c’hoari a bep seurt.	
Gerioù da c’houzout skrivañ	
4-a) e-pad – ehan – bugale – mistri – evezh – porzh. 4-b) kloc’h – mont - renk 4-c) darn – prantad – diskuizhañ – a bep seurt – keid-all	
Reizhskrivadenn prouad	
Da vare an ehan, e teu an holl war ar porzh. Bugale zo a red, darn a c’hoari, darn all a gont istorioù. Emañ ar vistri war evezh. Seniñ a ra ar c’hloc’h. Echu eo ar mare diskuizh a oa bet gortozet keid-all ha poent eo mont en e renk da vont d’ar c’hlas.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 5	Danzeadoù pleustret warno
5-a) Evit ar reizhskrivadenn e sip ar skolidi o spered en o skrivadenn hag e skrivont goustadik. Serriñ a reont o daoulagad ha klask kaout soñj eus dibennoù mat ar verboù.	<ul style="list-style-type: none"> • Tiegezhiad gerioù “skriv-“ . • Kemmadur dre vlotaat d / z (he d- / e z-) •
5-b) Emañ ar mestr o lenn ; ma amezegez a skriv ur ger war he dorn evit kaout soñj anezhañ ; emañ o klask penaos skrivañ ar gerioù diaesañ.	
5-c) E-pad ar reizhskrivadenn o deus spi ar skolidi e teuio soñj dezho eus reizhskrivadur ar gerioù diaes hag eus dibenn ar verboù. Emañ Brieg o sevel e zorn : n'en deus ket klevet mat ur ger.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
5-a) reizhskrivadenn – sipañ – goustadik – serriñ – daoulagad - dibenn	
5-b) amezeg(-ez) – ur ger – soñj – anezhañ – penaos - diaesañ	
5-c) spi 'm eus – reizhskrivadur – dorn – bemdez	
Reizhskrivadenn prouad	
Bemdez e reomp ur reizhskrivadenn. Pep hini a sip e spered enni. Goustadik e lenn ar mestr. Serriñ a ran ma daoulagad. Spi 'm eus kaout soñj eus reizhskrivadur ar gerioù hag eus dibennoù mat ar verboù. Emañ ma amezeg o skrivañ ur ger war e zorn da glask peseurt stumm eo ar gwellañ.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 6	Danzeadoù pleustret warno
6-a) Staliet o deus an termaji o zeltenn. Koulz an abadenn eo. Pignat a ra ar furlukin goapaer war an derezioù ha strinkañ dour d'ur plac'hig vihan.	<ul style="list-style-type: none"> • liester an anvioù tud gourel
6-b) Warc'hoazh ez in d'ar sirk da sellout ouzh troioù-ouesk an trapezer, ar fungerzher hag an doñvaer.	
6-c) Krog eo an abadenn, ha bamet omp gant ar furlukined : redek a reont dindan an deltenn ha war an derezioù. Pegen fentus eo !	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
6-a) staliañ – termaji – koulz – goapaer - strinkañ	
6-b) warc'hoazh – troioù-ouesk – trapezer – fungerzher – doñvaer	
6-c) kregiñ (krog) – bamañ – pegen - dreist-holl	
Reizhskrivadenn prouad	
Emañ an termaji o staliañ o zeltenn hag an derezioù. Pa vo koulz an abadenn ez imp da sellout ouzh troioù-ouesk an drapezourien, ar fungerzherien hag an doñvaerien. Met gortoz a raimp dreist-holl ar furlukined goapaer hag o zroioù fentus ha bamus.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 7	Danzeadoù pleustret warno
7-a) Emañ ar steredoniour o sellout ouzh ur blanedenn c'hlas nevez dre e bellseller.	<ul style="list-style-type: none"> • Kemmadurioù dre vlotaat goude ar berc'hennell "e". • Gallout gant 2 « 1 », sellout gant 2 « 1 », gwelout gant 1 « 1 ». • Liester e « ien ».
7-b) Hep pellseller ne c'hallan ket gwelout ar steredenn gevrinus-se gant an daoulagad hepken !	
7-c) Planedennoù zo na c'haller ket gwelout ken nemet gant ur pellseller. Heñvel int neuze ouzh kantennoù aour.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
7-a) steredoniour – sellout ouzh – planedenn – pellseller	
7-b) gallout – gwelout – steredenn – kevrinus - hepken	
7-c) heñvel ouzh – kantenn – aour – ken – gwall	
Reizhskrivadenn prouad	
Ur blanedenn gwall ziaes da studiañ eo Neizhan evit ar steredoniourien. Ne c'haller ket he gwelout hep ur pellseller. Dizoloet e oa bet e 1846. Heñvel ouzh ur gantenn c'hlas eo ha kevrinus-tre eo c'hoazh.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 8	Danzeadoù pleustret warno
8-a) Bremañ ez implij ar gouerien ar roboteg hag ar stlenneg da verañ o atantoù.	<ul style="list-style-type: none"> • Liester e « -i ».
8-b) Emañ ar c'houer o vont da c'horho ar saout laezh a zo o vlejal en o c'hraou.	
8-c) Un deiz marteze e vo robotoù da zastum ar frouezh er frouezhegi.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
8-a) kouer (kouerien) – roboteg – stlenneg – merañ – atant	
8-b) goro – buoc'h (saout) – laezh – blejal – kraou	
8-c) deiz – dastum – frouezh – frouezheg (frouezhegi)	
Reizhskrivadenn prouad	
Bremañ ez implij ar gouerien ar roboteg hag ar stlenneg da verañ o atantoù, evit goro ar saout lakaomp. Marteze e vo un deiz bennak robotoù da zastum ar frouezh er frouezhegi.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 9	Danzeadoù pleustret warno
9-a) Tommañ deiz ar bloaz e vo warc'hoazh. Disec'hiñ a ray an delioù er gwez abalamour d'an heol.	•
9-b) D'an nevezhañv ez eo karget ar bleñchoù a vroñsoù hag a zelioù bihan. Ar pesked liesliv a zifoup eus strad al lennoù.	
9-c) Kement a heol zo ken na rankan goleiñ ma fenn. Ar gouloù a ra droug da 'm daoulagad. C'hoant bras 'm eus da gavout ul lec'h gleb ha fresk evit distanañ.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
9-a) tomm – warc'hoazh – disec'hiñ – gwez – abalamour da 9-b) nevezhañv – bleñch – broñs – liesliv – difoupañ - lenn 9-c) kement a – goleiñ – gouloù – droug – distanañ – tev	
Reizhskrivadenn prouad	
Tommoc'h ha hiroc'h e vo an deizioù. Tevoc'h e vo ar broñsoù liesliv er gwez. Delioù bihan a zifoupo o fennoù bihan gleb. Bleñchoù nevez en em astenno war-du gouloù heol an nevezhañv.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 10	Danzeadoù pleustret warno
10-a) E 1853 e oa bet ganet Vincent Van Gogh en Izelvroioù. Pastor e oa e dad ha bet en deus un deskadurezh strizh ha kalet.	•
10-b) C'hoant en doa dont da vezañ pastor eñ ivez : avielañ, kelenn ha skoazell ar re baour. Diskenn a rae da strad ar mengleuzioù ha gweladenniñ ar glañvourien.	
10-c) E-pad ouzhpenn bloaz e oa bet war studioù da vont da bastor. Labourat a rae start met korbell en doa bet.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
10-a) Izelvroioù – pastor – deskadurezh – strizh – kalet 10-b) c'hoant – aviel – kelenn – klañvour – mengleuz - gweladenn 10-c) bloaz – korbell – siwazh – mengleuzier	
Reizhskrivadenn prouad	
Un deskadurezh strizh ha kalet en deus bet Vincent Van Gogh. C'hoant en doa bet bezañ pastor da gentañ evit avielañ, kelenn, skoazell ar re baour, gweladenniñ ar vengleuzierien hag ar glañvourien. Studiet en doa start met korbellet en doa bet siwazh.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 11	Danzeadoù pleustret warno
11-a) Eus kern ar menez-mañ e spurmanter an draoñiennig zon hag ar wazh-dour vihan, struzh stank a-hed he div c'hlann, a red enni.	•
11-b) En hañv diwezhañ e oa aet Trifin d'an Alpoù. Krapet he doa betek meur a gern ha merzhet e oa liesseurt al loened er menezioù.	
11-c) Chapel sant Herve zo war gern Tosenn Vre. Emañ a-us uhelgompezenn ledan Dreger.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
11-a) kern – menez – spurmantiñ – traoñienn – gwazh-dour – struzh – a-hed – glann	
11-b) hañv – diwezhañ – krapat – merzhout – liesseurt	
11-c) chapel – tosenn – Bre – a-us – uhelgompezenn – ardremez	
Reizhskrivadenn prouad	
E Bro-C'hall ez eus ardremezioù liesseurt : menezioù yaouank o c'hernioù uhel ha lemm hag o zraoñiennoù don ; tosennoù kozh o c'hernioù kromm, uhelgompezennoù ledan. Liesseurt ar struzh hag al loened enni ivez.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 12	Danzeadoù pleustret warno
12-a) Bemdez e sikourez da drepetoù an ti : skubañ a rez an diri, torchañ an daol ha renkañ al listri.	•
12-b) Daoust d'an trouz a zo bet graet dezhañ, n'en deus ket renket e gambr c'hoazh. Ul labour a zisplij kalz dezhañ eo.	
12-c) Ma zud a ra bemdez war-dro an trepetoù hep klemm na trueziñ morse.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
12-a) bemdez - trepetoù – diri – taol – listri	
12-b) daoust da – dezhañ – kambr – c'hoazh – displijout	
12-c) war-dro – hep – klemm – morse – trueziñ	
Reizhskrivadenn prouad	
Luduennig a rae war-dro an trepetoù displijusañ : skubañ al leur hag an diri, torchañ al listri, renkañ kambroù he c'hoarezed drouk. Daoust da se ne chome ket da glemm na da drueziñ.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 13	Danzeadoù pleustret warno
13-a) Pell zo, er gêriadenn-se, e oa niverus ar saout hag an deñved. Hiziv ez eus edeier e-lec'h ar peurvanoù.	•
13-b) Ral eo d'al labourerien-douar kozh-se mont e kêr. Gwell eo dezho chom war o douaroù gant o chatal.	
13-c) Emañ an dañvad o fringal : komprenet en deus e vo touzet ha ne blij ket dezhañ. Tec'hout a ra kuit pa wel al labourer-douar o nesaat.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
13-a) pell – kêriadenn – saout – deñved – hiziv – edeier – e-lec'h – peurvan 13-b) ral – labourer-douar – kozh – kêr – gwell – douar – chatal 13-c) dañvad – fringal – touzañ – kompren – tec'hout – gwelout – nesaat	
Reizhskrivadenn prouad	
Emañ al labourer-douar kozh o werzhañ e atant. Pell zo ne douz ket ken e zeñved. Ne 'z a ket ar saout d'ar gêriadenn ken. Ne laka mui ar c'houez da sec'hiñ war an orjalenn. Kompren a ran perak ez eo trist hiziv.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 14	Danzeadoù pleustret warno
14-a) Er gouelec'hioù traezh e vev kañvaled ha dremedaled. Nebeut-tre anezho zo gouez hiziv.	•
14-b) Botoù a reer gant krec'hin ar c'hañvaled, gloan gant o blev ha tan gant o c'haoc'h.	
14-c) Lard o deus an dremedaled en o zorgenn, peder godell en o stomog, ha ne c'hwezont ket kalz a zour.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
14-a) gouez – gouelec'h – traezh – kañval – dremedal – nebeut – anezho 14-b) kroc'hen – krec'hin – gloan – blev – kaoc'h 14-c) lard – torgenn – godell – stomog – c'hwezañ dour – kalz	
Reizhskrivadenn prouad	
Er gouelec'hioù traezh e vev kañvaled ha dremedaled. Ne c'hwezont ket kalz a zour ha peder godell o deus d'o stomogoù da virout dour, hag un dorgenn da virout lard. Botoù a ra an dud gant o c'hrec'hin, gloan gant o blev ha tan gant o c'haoc'h.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 15	Danzeadoù pleustret warno
15-a) Moarvat e klevot richan an evned hag ho po aon o klevout hopadennoù ar pennoù-kazh da serr-noz.	•
15-b) Klevout a reot frondoù c'hwek kaset gant an aezhenn : hini loened an atant ha hini ar foenn nevez-falc'het.	
15-c) Abred diouzh ar beure e plegot ho teltenn hag e renkot ho sac'h-kousket. Goude-se ez eot d'ar c'hoad da glask gwelout ar yourc'hed.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
15-a) moarvat – klevout – richan – hopadenn – penn-kazh – serr-noz – fenz	
15-b) frond – c'hwek – aezhenn – foenn – nevez-troc'het	
15-c) abred – teltenn – sac'h-kousket – goude-se – gwelout – yourc'h	
Reizhskrivadenn prouad	
Fenz ez in da gousket er-maez. Klevout a rin moarvat richan an evned. Abred diouzh ar beure e renkin ma zeltenn hag e klaskin gwelout ur yourc'h. Ma teuez ganin ne 'm bo ket aon o klevout ar pennoù-kazh o hopal. Klevout a raimp frondoù c'hwek an aezhenn veure.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 16	Danzeadoù pleustret warno
16-a) Ober a ra ar vag un ehan war un enezenn heñvel ouzh ar baradoz evit ober un dresañ dezhi. Ober a ra ar skipailh e vad eus an amzer-se da vont da sellout ouzh loened ar vro. Gwelout a reont koalaed koant-tre.	•
16-b) A-daol-trumm ez eo sachet evezh ma c'hamalad gant ur vodenn o fiñval. Ur c'hoala bras-tre ha louet a zeu er-maez eus ar vodenn.	
16-c) War an inizi-se heñvel ouzh ar baradoz o deus dizoloet ar vartoloded loened heñvel ouzh arzhed bihan : koalaed int.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
16-a) ehan – heñvel ouzh – baradoz – dresañ – skipailh – koala - koant	
16-b) a-daol-trumm – bodenn – fiñval – louet – er-maez	
16-c) enezenn – inizi – dizoleiñ -	
Reizhskrivadenn prouad	
Evit beure omp erruet war un enezenn heñvel ouzh ar baradoz. Divizet hone us ober un ehan warni evit ober un dresañ d'ar vag. A-daol-trumm o deus ma c'hamaladed sachet ma evezh war ul loen iskis. Gwelet 'm eus un doare arzh bihan louet koant : ur c'hoala an hini e oa.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 17	Danzeadoù pleustret warno
17-a) Alies e veze an dremmour-se ur vantell vras teuc'h en-dro dezhañ. Dalc'hmat e oa birvilh en e zaoulagad liv kelvez.	•
17-b) Alies en em gaven gant an dremmourez-se flour he mouezh er c'hoariva. Aon 'm boa komz ganti ha ne greden ket tostaat outi.	
17-c) Da vare abadenn ziwezhañ ar pezh-se e oamp, ma mignoned ha me, er renk kentañ evit stlakañ hon daouarn d'an dremmourien a oa daeroù en o daoulagad.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
17-a) dremm – dremmour – mantell – teuc'h – en-dro – dalc'hmat – birvilh – kelvez 17-b) alies – en em gavout – mouezh – c'hoariva – tostaat 17-c) abadenn – diwezhañ – pezh – stlakañ – daouarn – daoulagad	
Reizhskrivadenn prouad	
Alies e veze ur vantell vras teuc'h en-dro dezhañ. Liv kelvez e oa e zaoulagad ha flour e oa e vouezh. Dremmour c'hoariva e oa. Ne greden ket komz outañ met dalc'hmat e oan er renk kentañ da sellout gant ma mignoned ouzh e abadennoù. Ha ne oamp ket ar re ziwezhañ o stlakañ hon daouarn dezhañ.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 18	Danzeadoù pleustret warno
18-a) War aodoù Mor Breizh e kaver kêriadennoù pesketaerien skubet gant avelioù flour pe treut.	•
18-b) Gouel ma bag a oa c'hwezhet gant un avel greñv. Pellaat a raen diouzh an aod ha teurel a ris ma roued en dour.	
18-c) Pediñ a ra ar besketaerien evit ma vo mat ar peskerezh. Gwintet o deus ar gouelioù, pellaet int eus an aod ha taolet o deus o rouedoù er mor.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
18-a) aod – Breizh – pesketaer – skubañ – treut 18-b) gouel – c'hwezhañ – kreñv – pellaat – teurel (taol-) – roued 18-c) pediñ – peskerezh – gwintañ	
Reizhskrivadenn prouad	
War aodoù Breizh e kaver ur gêriadenn pesketaerien. E deroù an hañv e vez skubet ar mor gant avelioù flour ha kreñv. C'hwezhañ a reont gouelioù ar bigi ha pellaat a ra ar besketaerien war arm or evit teurel o rouedoù. Pediñ a reont evit ma vo mat ar peskerezh.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 19	Danzeadoù pleustret warno
19-a) E dibenn an abardaez e pedomp dalc'hmat hon tad da gontañ dimp un istor a-raok mont da gousket.	•
19-b) Deskiñ a ra ma breur e gentelioù ouzh e vurev ha pa grog da vazailhat re ez a da gousket.	
19-c) Bemnoz, goude bezañ selaouet an istor, e plegit ho tilhad hag en o renkit. War-lerc'h ez it da gousket.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
19-a) dibenn – abardaez – dalc'hmat – a-raok – kousket 19-b) deskiñ – kentel – burev – kregiñ (krog) – bazailhat 19-c) bemnoz – selaou – plegañ – dilhad – renkañ – war-lerc'h	
Reizhskrivadenn prouad	
Plijout a ra kalz din an abardaezioù tremenet ganeoc'h, pa bedit ac'hanon da gontañ un istor deoc'h pa vez ho preur o teskiñ e gentelioù ouzh e vurev. Ha pa grogit da vazailhat e kasan ac'hanoc'h d'ho kambr e-lec'h ma plegit ha ma renkit ho tilhad a-raok mont da gousket.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 20	Danzeadoù pleustret warno
20-a) Warlene hon doa bet meur a gazh bihan startijenn enno. O c'harout a raemp kalz.	•
20-b) Ur bisig a skoas klañv. Ne oa ket bet en e vleud e-pad devezhioù. Bremañ ez eo yac'h avat !	
20-c) Kizhier an amezeg a oa skoet klañv dec'h. Galvet eo bet mezeg al loened. Ha gwell a se rak pareet int bet hag en o bleud emaint adarre !	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
20-a) warlene – kazh (kizhier) – startijenn – karout 20-b) bisig – klañv – bleud – devezh – yac'h – avat – e-pad 20-c) amezeg – gervel (galvet) – mezeg – gwell a se – pareañ – dec'h	
Reizhskrivadenn prouad	
Pemp bloaz zo em boa bet tri bisig bihan. O c'harout a raemp kalz. Klañv e oant bet e-pad devezhioù war-lerc'h avat. Trist e oamp bet ma c'hoar ha me. Gwell a se, bet e oa mezeg al loened ha pareet e oant bet buan : bremañ int tri c'hazh yac'h hag en o bleud.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 21	Danzeadoù pleustret warno
21-a) Derc'hent ar c'hentañ a viz genver e vo aozet ur fiskoan war an ton bras evit lidañ ar bloaz nevez.	•
21-b) Ar re gozh a c'hello koaniañ laouen asambles endra zañso ha c'hoarzho ar re yaouank en tu all d'ar sal e-pad an noz.	
21-c) Goude ar fest e naetai ar sal, hag e skaotimp hag e torchimp al listri.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
21-a) derc'hent – kentañ – fiskoan – lidañ 21-b) koaniañ – laouen – asambles – endra – c'hoarzhin – yaouank – sal 21-c) naetaat – skaotañ – aozañ – dav	
Reizhskrivadenn prouad	
Derc'hent ar c'hentañ a viz genver e vo aozet ur fiskoan gant ma zud. Laouen e vo an holl ha lidet e vo ar bloaz nevez a vo brav-tre ! Ar re yaouank hag ar re gozh a zañso hag a c'hoarzho asambles e-pad an noz. Siwazh, an deiz war lerc'h e vo dav naetaat, skaotañ ha torchañ pep tra !	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 22	Danzeadoù pleustret warno
22-a) Pa serr an noz e krog an avanked da gempenn o foukennoù koad savet war enezennoùigoù e-kreiz ar stêr.	•
22-b) Graet ez eus glav e-pad an deiz ha toenn foukenn Abrobin zo dirapar. Mont a ra da zastum ha da droc'hañ skourroù d'he dresañ.	
22-c) Neuieren ampart eo an avanked. Dastum a reont skourroù hag o c'has betek o foukennoù e-kreiz ar stêrioù. Bemnoz, c'hoazh hag adarre, e reont evel-se.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
22-a) serrañ – avank – kempenn – foukenn – enezenn – stêr 22-b) graet (ober) – e-pad – toenn – dirapar – dastum – skourr – dresañ 22-c) neuñval – neuier – riblenn – ampart – c'hoazh – adarre	
Reizhskrivadenn prouad	
Pa serras an noz war ar stêr e kempennas an avank e foukenn evel bemnoz. Kouezhet e oa glav bras e-pad an deiz ha dirapar e oa an doenn. Evit he c'hempenn e troc'has hag e tastumas an avank koad war ar riblenn hag o c'has en ur neuñval betek e foukenn a oa savet war un enezennig e-kreiz ar stêr.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 23	Danzeadoù pleustret warno
23-a) Warc'hoazh e vo deiz-ha-bloaz Nikolaz ha, dres, ar Merc'her e vo. Pedet en deus e vignoned hag e dud-kozh war un dro.	•
23-b) « Ha dont a reot ? » a c'houlenñ ouzh e holl gamaladed skol e-pad an ehanoù. « Daoust hag-eñ e teui, te ivez ? », a c'houlenñ da bep hini.	
23-c) Pesketaer eo ma eontr ha pa vez digor ar peskerezh e 'm c'has bep Merc'her war ribl ar stêr da zeskiñ pakañ dluzhed.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
23-a) deiz-ha-bloaz – dres – Merc'her – warc'hoazh 23-b) dont – kamalad – goulenn – ehan – daoust hag-eñ – hini 23-c) eontr – moereb – peskerezh – dluzh – eget	
Reizhskrivadenn prouad	
Laouen bras eo an holl rak warc'hoazh, Merc'her, e vo gouel deiz-ha-bloaz Nikolaz ha pedet en deus e dud-kozh da zont. Pesketaer eo e dad-kozh hag evel bep bloaz e kaso an holl da besketa dluzhed war ribl ar stêr. Daoust hag-eñ e teuimp a-benn da bakañ muioc'h egetañ an dro-mañ ?	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 24	Danzeadoù pleustret warno
24-a) Er Grennamzer e veve an aotrounez e kastilli. Plijout a rae dezho jiboesaat ha brezeliñ a raent an eil re a-enep d'ar re all.	•
24-b) Ar gouerien a laboure start evit an aotrounez o gwareze. Mediñ a raent edeier evel ar gwinizh, an heiz, ar c'herc'h ha sevel loened.	
24-c) Ar gouerien a veve e tiez bihan ha debriñ yod, bara, irvin. Ne c'hallent ket debriñ kalz a gig peogwir e oa ar jiboez d'an aotrounez.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
24-a) Krennamzer – aotrou (-nez) – kastell – jiboesaat – brezel – a-enep 24-b) kouer – gwareziñ – mediñ – ed (-eier) – gwinizh – heiz – kerc'h – loen 24-c) ti (-ez) – gallout – kig – peogwir – jiboez	
Reizhskrivadenn prouad	
Er Grennamzer e veve an aotrounez e kastilli. Plijout a rae dezho jiboesaat ha brezeliñ a raent an eil re a-enep d'ar re all. Labourat a rae ar gouerien evit an aotrounez. Mediñ a raent edeier ha sevel loened. Bevañ a raent diwar yod gwinizh, heiz pe kerc'h, ha bara peogwir ez ae ar jiboez d'an aotrounez.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 25	Danzeadoù pleustret warno
25-a) Grimandellañ a raio ar spier potailh ar ranndi. Tre ez aio er burev ha furchal en tiretennoù evit follennata an teulioù kuzh-klenk.	•
25-b) Gwiriañ a raio an implijad ez eo an teul a vo roet dezhañ an hini a oa o klask da vat ha gervel e eiler.	
25-c) Pakata a raimp start ar prof a roimp da 'm c'hoar warc'hoazh pa 'z aimp d'he gwelout en he ranndi nevez.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
25-a) grimandellañ – spiañ – potailh – ranndi – burev – follennata – kuzh – klenk	
25-b) gwiriañ – implijad – gervel – eiler	
25-c) pakata – start – c'hoar – gwelout – kefridi – eme – pellgomz	
Reizhskrivadenn prouad	
« Setu da gefridi spier kentañ, » eme ar rener. « Da gentañ e c'hrimandelli ar botail. Da eil e teui tre er ranndi. War-lerc'h e follennatai an teul kuzh-klenk evit gwiriañ ez eo tre an hini a glaskomp hag e pakatai anezhañ start. Warc'hoazh e pellgomzin dit. Klevet eo ganit ? »	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 26	Danzeadoù pleustret warno
26-a) Er gaouidell ez a ar gwiñvered da guzh e pep korn. Ma tosta nep piv bennak da gemer unan anezho e lammont a bep tu.	•
26-b) Kroget en deus ar razh-doñv er paotrig a felle dezhañ e gemer. Emañ e zorn o wadañ ha garmiñ a ra. D'ar sal-dour e red d'en em brederiañ.	
26-c) Tec'het eo ar gwiñver gouez en ur c'horn eus ar gambr ha kerkent ha ma vo digoret an nor e lammo er-maez.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
26-a) kaouidell – gwiñver – korn – nep – pep – bennak – lamm – piv	
26-b) kregiñ – razh – doñv – fellout – gwadañ – garmiñ – sal – prederiañ	
26-c) tec'hout kuit – gouez – kambr – kerkent ha – er-maez – astenn	
Reizhskrivadenn prouad	
Tostaat a reas ar plac'hig he dorn er gaouidell : ar gwiñver spontet a dec'has en ur c'horn. Astenn a reas c'hoazh he dorn da gemer anezhañ ha kerkent e krogas al loen ennañ ! Garmiñ a reas ar bugel ha redek d'ar sal-dour da brederiañ he dorn leun a wad. Peogwir e oa chomet digor an nor e lammas ar gwiñver er-maez hag eñ da redek er gambr...	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 27	Danzeadoù pleustret warno
27-a) E don ar c'hoadegoù teñval ha gleb e kaver euzhviled divalav ha blevek a vev e mougevioù. Pakañ a reont logod gant o divvrec'hioù hir ha melen sklaer.	•
27-b) Euzhus e oa ar roñfl : ur penn tev ha ruz, un troadig moan orañjez divalav, ur genoù bras ha daoulagad sklaer blevek.	
27-c) An euzhvil e dreid bihan n'eo ket evit redek. Sklaer eo ! Gant e zivvrec'h hir ha moan e pak ul logodenn a laka en e c'henoù bras divalav ha gleb.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
27-a) don – koadeg – teñval – gleb – mougev – euzhvil – divalav – divvrec'h – sklaer – logod – blevek	
27-b) euzhus – roñfl – orañjez – genoù – daoulagad – tev – moan	
27-c) treid – redek	
Reizhskrivadenn prouad	
E don ur goadeg teñval, en ur vougev c'hleb, e veve un euzhvil blevek gant ur roñflez divalav : ur penn tev ha ruz en doa ha treid bihan moan na oa ket evit redek ganto. Ur genoù bras ha daoulagad orañjez sklaer he doa hi, ha divvrec'h hir a bake logod ganto.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 28	Danzeadoù pleustret warno
28-a) Skuilhit ar yaourt er saladenaouer. Ouzhpennit ar vioù torret hag ar sukr. Meskit ken na vo pouloudenn ebet ken.	•
28-b) Meskomp ar bleud, ar sukr, ar vioù hag ar yaourtoù evit ober ur wastell vat a lakaimp da boazhañ er forn e-pad ur c'hard eur.	
28-c) Skuilhañ a ran un hanter vuzul sukr, daou vuzul bleud hag ouzhpennañ plusk un orañjezenn. Lakaat da boazhañ ha blazata. Arabat ankouazh lazhañ ar forn !	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
28-a) skuilhañ – yaourt – saladenaouer – ouzhpenn – torr – pouloud – ebet	
28-b) meskañ – bleud – gwastell – lakaat – poazhañ – forn – kard eur	
28-c) hanter – muzul – plusk – blazata – arabat – ankouazh – lazhañ – sac'had – goell	
Reizhskrivadenn prouad	
Skuilh ur yaourt en ur saladenaouer. Kemer tri muzul bleud, daou vuzul sukr... Ouzhpenn ur sac'hadig goell hag ur meudad holen. Torr daou vi ha raskl ur bluskenn orañjezenn. Mesk mat evit na chomo pouloudenn ebet ha laka da wastell er forn e-pad tri c'hard eur. Prest eo ! Blazata a c'hallez ober bremañ.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 29	Danzeadoù pleustret warno
29-a) Dour ar glaveier a ya d'ober ur wazh a dro hag a zistro en ur redek betek ar stêr. Ar glav a ra ivez d'an oghenoù ma ev al loened mont dreist ar barr.	•
29-b) Meurstêrioù eo a reer eus ar stêrioù en em daol er mor. Genoù ur stêr eo al lec'h m'en em daol er mor dres.	
29-c) Diazadoù ar meurstêrioù eo strollad ar stêrioù ha gwazhioù en em daol enno. Diazad al Liger zo ennañ kalz a stêrioù hag a wazhioù.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
29-a) glav / glaveier – gwazh – oghenn – dreist – barr 29-b) meurstêr – teurel / taol – lec'h 29-c) diazad – strollad – Liger	
Reizhskrivadenn prouad	
Dour ar glaveier a ya d'ober gwazhioù bihan. Ar gwazhioù bihan-se en em gav d'ober stêrioù brasoc'h en em daol er meurstêrioù. En em deurel a ra ar meurstêrioù er mor dre o genoù. Strollad gwazhioù ha stêrioù ur veurstêr zo un diazad.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 30	Danzeadoù pleustret warno
30-a) En ur faou e vev al lern. Tre ez eont dre douarennoù teñval. Er-maez ez eont pa serr an noz ha pa ne glevont trouz ebet ken.	•
30-b) En em lakaat a reas al louarnez da c'hwesda, difiñv, he divskouarn e bant. Ur c'hammed a reas ha, pa ne glevet trouz ebet, e skarzhas d'ar piltrot betek ar c'hoad teñval.	
30-c) Gortoz a ris e tiskouezfe al louarnig beg e fri. Kerkent ha ma welas ma zreid e skarzhas evel un tenn war ar pallenn delioù sec'h a oa en-dro d'e faou.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
30-a) faou – douarenn – louarn / lern – er-maez – trouz 30-b) c'hwesda – fiñval – divskouarn – e bant – kammed – skarzhañ – piltrot 30-c) diskouez – kerkent ha – tenn – pallenn – delienn / delioù – sec'h	
Reizhskrivadenn prouad	
Alanig al louarn a bignas en douarenn deñval betek toull e faou. Lakaat a reas beg e fri lemm er-maez en noz da c'hwesda. Ur c'hammed a reas. Pa oa o vont da skarzhañ d'ar piltrot betek ar c'hoad e klevas un trouzig evel pa 'n dije unan fiñvet un troad war ar pallenn delioù sec'h. Difiñv e chomas, e zivskouarn e bant.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 31	Danzeadoù pleustret warno
31-a) Er bed a-bezh e c'hounez mab-den pevar-ugent seurt legumaj disheñvel. Darn anezho zo gwrizioù, darn all ognon, re all c'hoazh torzhelloù.	•
31-b) Mat e kavan ar c'harotez, ar pinochez, ar piz hag ar c'haol-fleur. Ne gavan ket mat ar fav, an ognon hag ar c'hignen.	
31-c) Pemp frouezhenn ha legumajenn bemdez ! O gar, o delioù, o gwrizioù pe o greun a zebromp. Darn anezho n'int ket legumaj avat, met frouezh evel an tomatez hag ar c'hokombr.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
31-a) legumaj – a-bezh – gounit / gounez – pevar-ugent – disheñvel – darn – gwrizioù – ognon – torzhelloù 31-b) karotez – piz – kaol-fleur – fav – kignen 31-c) frouezh – avat – kokombrez	
Reizhskrivadenn prouad	
Ouzhpenn pevar-ugent seurt legumaj a zo gounezet gant mab-den er bed a-bezh. Darn anezho zo gwrizioù, evel ar c'harotez, darn ognon, evel an ognon hag ar c'hignen, darn c'hoazh torzhelloù evel an avaloù-douar. Debrñ a reer gar ha delioù ar pinochez, ar piz hag ar fav zo greun hag ar c'haol-fleur zo bleunioù n'int ket azv. An tomatez hag ar c'hokombrez, int, zo frouezh ha n'int ket legumaj.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 32	Danzeadoù pleustret warno
32-a) A-raok dibradañ e reer d'an dazloc'herioù tommañ. Emañ an nijerez en arsav da c'hortoz e lestro an dreizhidi.	•
32-b) Pa vo serr an nor ha staliet-mat an dreizhidi en o flas e c'halla an nijerez ruilhal war al loabr, sankañ tizh ha dibradañ.	
32-c) Un den zo o tont en ur redek gant dale. Siwazh, emañ an dreizhidi all staliet en nijerez a zo o pellaat bremañ war an dremmwel.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
32-a) a-raok – dibradañ – dazloc'her – nijerez – arsav – treizhad / treizhidi 32-b) plas – gallout – ruilhal – loabr – sankañ – tizh 32-c) siwazh – pellaat – bremañ – dremmwel – bouzar	
Reizhskrivadenn prouad	
Abaoe ur c'hard eur emañ an Airbus o tommañ he dazloc'herioù a ra un trouz bouzarus. Emañ an holl dreizhidi en o flas. Serr eo an dorioù. Ruilhal a ra an nijerez war al loabr. Emañ galloudezh he dazloc'herioù en o barr bremañ, he fri o sevel, he rodoù o tibradañ. Prestik ne vo ken nemet ur poent bihan war an dremmwel.	



Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 33	Danzeadoù pleustret warno
33-a) Er skol e reomp ur redadeg emreterian. Implijout a remp ur gartenn a ziskouez ar balizennoù da gavout.	•
33-b) Gant ma zud ez eomp alies en hentoù bale. An hent ne vez ket diskouezet mat bepred.	
33-c) Evit mont da vale er c'hoad pe er menez e ranker kaout ur gartenn. Pa ne ouzer ket mui pelec'h emeur ez eo gwell distreiñ war e giz.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
33-a) redadeg – emreterian – implijout – diskouez – balizenn 33-b) tud – alies – hent – bale – bepred 33-c) rankout – gouzout – gwell eo – distreiñ – kiz	
Reizhskrivadenn prouad	
Fazi emreterian - Abaoe div eurvezh emamp o vale, met bremañ ne ouzomp ket mui : emañ an hent en ur forc'h met ar gartenn n'en diskouez ket. Da belec'h mont ? A gleiz pe a zehou ? Ne ouzomp ket mui pelec'h emamp. Ha gwell eo mont war-raok pe distreiñ war hon c'hiz.	

Reizhskrivadennoù gourdonañ sizhun 34	Danzeadoù pleustret warno
34-a) Ur gwir hunvre eo mont da veajiñ evidon. Gweladenniñ kêrioù bras, treuziñ morioù, pignat gant menezioù...	•
34-b) Birvilh holl on ! Warc'hoazh ez an kuit d'ar gouelec'h evit gweladenniñ lec'hioù nebeut anavezet !	
34-c) Birvilh zo ennon pa veajan. Ha leun eo ma fenn gant eñvorennoù pa zistroan.	
Gerioù da c'houzout skrivañ	
34-a) hunvre – gweladenniñ – kêr – treuziñ – pignat gant 34-b) birvilh – warc'hoazh – gouelec'h – lec'h – nebeut – anavezout 34-c) eñvor	
Reizhskrivadenn prouad	
Beajiñ zo ur gwir hunvre evidon. Gant birvilh en em aozan da vont kuit. Gweladenniñ a ran kêrioù bras ha lec'hioù nebeut anavezet, treuziñ gouelec'hioù, pignat gant menezioù. Ha leun eo ma fenn gant eñvorennoù pa zistroan.	

